



BUTUN... D'AR MERC'HED!

gant kaner brudet ar vro Ifik MOAL

I

Breman potret a merc'het
An oll a c'hello fumi
A lezen zo eruet
An oll a vo dizoursi.

II

Petra zo en em gavet
Perak al lezen nevez
Rei butun d'ar merc'het
A zo koll kemen maouez.

III

Gwelet vo er parkeier
Ar merc'het, tivogedi
Diouz an noz, barz ar c'heier
Voassoc'h 'vit an tan en ti.

IV

Pa zein d'ar c'hor ar zaout
En o guinou er megot
Butun atao rankin kaout
Attention ar bern kolo.

V

Soazik pa reio krampoez
War ar bilig en aoled
A pa poazo patatez
Bep pred vezin mogedet.

VI

Butun, feuille, allumetez
Avo breman er saccoc'h
'Vit heuilla a c'hiz nevez
Oll verc'het yaouank a koz.

VII

Gwelet vo er pardonniou
An oll verc'het o fumi
Atao e-barz o ginou
Sigaret pe er c'horn pri.

VIII

A re o d'o c'hoant chikat
A vo braoc'h da velet
Gwelit vezin o chaogat
Beteg ma zein da gousket.

IX

Fumi, chikat a priza
Mareat a vezo kountan
Kredi ran ia memez tra
Eo sot ar c'houarnaman.

X

Ober, ober lezennou
Avechou a zo dister
Butun d'ar merc'hedigou
Neo ket 'vit ar Finister.

XI

Kredi ran e Breiz-Izel
E lec'h fumi ar merc'het
A gano a vouez uhel
Lezom butun d'ar botred.

XII

Evit ober plijadur
D'ar merc'het pad ar zizun
Gouarnaman bezit fur
D'ar goazet roit o butun.

PABOR KASTELL.

Son ar merc'hed a zoare

gant kaner brudet ar vro IFIK MOAL

I
Selaouit mad ia va mignonet
Ar zon nevez a zo d'eoc'h kanet
Rak gwelit ta ar merc'hedigou
A ra breman o ia kals ardou.

II
Abaoue m'o d'euz droit da voti
E vez klevet Soazik a Mari
An eil hag e ben o lavaret
Ni a zo gwest evel an holl botret.

III
Me lavar Soaz a vo depute
Mari lavar me a vo ive
Assamblez ni reio lezennou
Da lakat renk en holl botredou.

IV
Ar merc'hed breman o d'euz butun
Er pakat da ober o zizun
A neuze pa vez ganto fumet
E laeron c'hoaz ini o goazet.

V
En noz tremenet va ini goz
A zo bet savet e kreiz an noz
Fouliet e d'euz din va godellou
Koumer va butun a va megoiou.

VI
Er c'hiz nevez c'hoaz zo eruet
Bragezeier hir gant ar merc'hed
Setu perak ni paotret iaouank
A rank oela evit kaout unan.

VII
Dizale ni zougo a losten
Er zea ver hag er c'hoeffig gwen
Kredi ran neuze dez moulargez
Er vro, er vro a vezo bemdez.

VIII
War ar vatiman martolodet
Er rejiman breman soudardet
Ar merc'hed a ielo d'ar brezel
Evit difen ar Frans a Breiz-Izel.

IX
'Vit enebi ar boum atomik
E vo kasset Louise a Marik
C'hoarzin vo great o velet Soaz
Pa vo war e ginou er mask a gaz.

X
Poen eo din paouez rak ar merc'hed
Ouzin eb dale a vo fachtet
Potred iaouank araok dimezi
D'ar merc'hed lavarit eb damanti.

XI
Me zimezo ia gant er vaouez
Hag a lizo ganen va bragez
Me a gano a vouez va fen
Va greg dime ranko kaout el losten.

PABOR KASTELL.

C'HOANT EM EUZ FORTUNIA

gant kaner brudet ar vro IFIK MOAL

I
Selaouit merc'hed iaouank
Ecoutez ma chanson
Dimezi me am euz c'hoant
Je suis joli garçon.

II
Me zo gwest da labourat
Je sais bien travailler
Ia me a zo er potr mad
Tel que vous me voyez.

III
Biken en ostaleri
Je n'aime pas la boisson
Cognac, gwin hag eau de vie
Pour moi, c'est du poison.

IV
Fumi ne ran ket ive
Trop cher est le tabac
O er vaouez ganen me
Economie fera.

V
Dar zul e kreiz an iliz
Je fais ma prière
Mareat a iaouankiz.
Font bien le contraire.

VI
Ne vezan mui o tansal
Je n'aime pas la danse
Ar zaout me vez o tioual
Et alors je pense.

VII
E Mari va dousik koant
Ma jolie bretonne
Ne d'euz aour na arc'hant
Mais elle est mignonne.

VIII
Pa vezin me fortuniet
Ma femme s'ra heureuse
Ganti pa zin da gousket
Si elle est frileuse.

IX
Me dommo e zreid dezi
Pas besoin d'bouillotte
Le matin café au lit
Je f'rai la popote.

X
Va maouez a vo eurus
Croyez mad'moiselle
Me a vo karantezus
Je n'aimerai qu'elle.

XI
Araok echui va janson
Je dis : jeunes filles
'Ni a rofe d'in e c'halon
Serait bien gentille.

XII
Me am euz c'hoant fortunua
Je prends la première
Piou lavaro dimme ia
Devant Monsieur l' Maire.

PABOR KASTELL.

Evit er friko, plijadur a Muzik...

... gant JAZZ an daou IFIK